

Groeg ar Cheminod.

I.

 Gaodik Keralsi oa eur plac'h
 Zeder ha koant, n'heller hen naç'h,
 Ha neb-lec'h na vije gwelet
 Merc'h iaouank braos'h kempennet. —

 Ja , bounès 'oa eur farodez ,
 Ha wit-hi da vez-han mâtez ,
 Er barroz-holl na weljeac'h ket
 Eùn-all 'viye kaerroc'h gwisket. —

 An holl baotred iaouank ar vrò
 Hi c'harrie, a glaske an drò ,
 Ewit ober d'ez-hi al lez ,
 Er pardonioù , ieùriou-newez.

Med hi na ree med hō goapad ,
Distrei gant faé hi daoulagad : —
— Adrèn ! — m'è-z-hi , — paotrik ar zaouët !
N'è ket da seurt a fell d'in kaoût !

• N'c'houleñnan ket eùn debrer iod ,
• Eur mic'hiiek , eur bris-diod ,
• Nag iwe eùn turnier-douar ,
• N'oùn ket 'wit ar rùmm-ze , c'hui ðar ? —

Gaodik koant , me anvez hō tad ,
Iwe ho mamm , kristènien vad ;
A vew en poan , en paourenteze ;
Hò kiewet a zò eùn druez . —

II.

Setu dimèzet Gaodik koant ,
D'eùn dèn 'c'hone kalz a arc'hant ,
Ha bêt d'ez-hi eur Cheminod ,
Sò hi c'hano Limousinod .

Limousinod 'zò a vrò-bell ,
N'eò ket gañet en Breiz-Izell ;
Vel eùn aotrou ez è gwisket ,
Vel eur persoñez è disket . —

Na gomz nemed ar Gallek-c'houek ,
Ha faé râ eùz ar Brezônek ,
Hag eùz holl babtred an Armor ;
Hénès vad a zò eur pabor ! —

Kàrout 'ra kaer ar chistr , ar gwin ,
Hag ar vòtail hag ar chòpin
Ez eo ar benwiou , me grèd ,
Peuryvia gant-han 've gwelet .

Eiz dé penn-da-benn eo pàdet .
Dansou ha festou ann eûred ,
Ma lavaré ann holl dûd fûr : —
— « Kement-mà 'dremen ar muzar ! » —

Allaz ! brema 'zò eûn dans-all ; —
Al Limousinod , an dèn-fall ,
Na râ nemed souetan arc'hant ,
Ha pilad 'wechou Gaodik koant !

Gwassoc'h 'zò c'hoaz , an dén dîroll ,
P'hen eûz debret ha lonket holl ,
Eur mintinn a zò diskampet ,
Ha né ðar dèn pe-lec'h eò eet . —

Ha setu n'eûz choûmet netra ,
Arc'hant , na dillad , na bara ,
Gant Gaodik paour , med eur bûgel ,
Eur bûgelik , prest da c'henel !

N'en eûz choûmet , 'wit holl vâdou ,
Med eûn tòk-plouz , eur c'hôz vrugou ,
Boutaillou ha daou gorn bûtun ,.....
Groeg paour , setu oe'b holl fortud ! —

III.

Mer' hed iaouank a Vreiz-Izell ,
Ann dûd deût eûz ar brôiou-pell ,
A ve 'vel Aotrounez gwisket ,
Cheminôëd ha Gallaoued ,

Diwaller mad out-hè merc' hed ,
Hà n'hò c'hredet ket re-abred : —
Med kemerret d'in eur Breizad ,
Eul labourer, eur c'hristen-mad ! —

FIN.

Propriété de l'Éditeur

J. H.